


Our Weillharder Weizeler



XL

EUR VEILHADENN VREIZEK

Dirak kraouig Bethléem

gant Brogarour-Rozec

E Ti an aberour :

R. P. ROZEC Louis
Froud-wenn, Guipavas, Finistère
C. C. 80.793-Rennes

Skeudennet gant Langleiz

Nihil obstat
Si Laurentii ad Separim
die 20 septembris 1945.

Th. RONSIN S. M. M.
sup. gen.

Kemper, 28 a, viz Gwengolo 1945
Aotre da voula

Jh. CADIOU
Vikel-Vras.

An Enkanter pe an Embanner :

Va mignoned ha va c'henvroiz ker,
Evit digeri ar veilhadenn-man en enor d'ar Mabig Jezuz ha d'E
Vamm garet, ar Werc'hez Vari, ar baotred yaouank a zo o vont da gana :


« Ar wir Vreiziz ».



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2019

Ar wir Vreiziz



II

Hag e ve garm pe nec'hamant,
Ni 'zoug enor d'hor gwiskamant.

VI

Koant eo Breiz gant he menezioù,
Gant mantell glasvez ar maezioù.

III

Ni 'gan laouen, ni 'gan atao
Hor c'hantikou, hor soniou brao.

VII

Gwech o lipat, gwech all a-gas.
Ar mor a c'houriz-hi gant glas.

IV

Ma vez korollet c'hoaz e Breiz,
Ne vo ket hon dansou direiz.

VIII

Dre-holl eo bet skignet he brud
Gant istor taolioù kaer he zud.

V

Ni 'venn degas ar c'hiz en-dro
D'hon dansou koz, dansou hor bro.

IX

Ma tougomp karantez d'hor Breiz
Kalz gwelloc'h e karomp hor Feiz.


X

Enep ar bed, enep ar c'hiz,
D'hon tenzorioù ni 'zalc'ho striz.

An Enkanter

An hevelep paotred yaouank a zo o vont da gana d'eoc'h breman eur
c'han-bale:

Kerzomp, paotred



II

Ni 'venn derc'hel hor c'hoifou **glan**
Dre virout ouz kement pec'hed.
Ouz ebatou ne reomp ket van :
D'ar gwir dudi hon eus sec'hed.

IV

Ni hon eus c'hoant **gounit** an dud
D'hor Feiz Kristen ha d'hon eurvad.
Dre-se, breudeur, skignomp ar brud
Eus eur baradoz hag a bad.

III

Er bed poanuis, ni 'chom **laouen**,
Pa'z eus ennomp levenez barr.
Gant c'hoarz eta, gant kanaouenn,
War hent an nenv, bale ni 'gar.

V

Skoazellet gant Mari, hor mamm,
Ha gant Jezuz hor breur hena.
Lorc'hus, laouen, gredek ha **flamm**
E vimp hep mez hag hep krena.

Noel! Noel!

MISTER SANTEL NEDELEG



**Puer natus est nobis
Eur bugel evidomp a zo ganet!**

D'ar Mabig Jezuz ha d'E Vamm garet
Kinnig doujus ha karantezus.

Brogarour-Rozec.

Eveziadennoù

1° Kantikou ar mister-man a c'hell beza kanet en iliz. Evit lavarout mat, kempennet int bet gant an oberour da genta-holl evit an iliz hag evit amzer Nedeleg.

2° Evit ma vezo kavet ar c'hantik « **Dindan ar volz steredennet** » en e bez, ez eo bet hen lakaet gant e holl boziou, e lost ar mister.

3° Pevare koublad « **O noz sioul** » n'eman ket da veza kanet er mister-man. Lakaet eo koulskoude en e blas, met etre krochedou, en aviz ma ve kanet en iliz, a-unan gant ar poziou all.

4° Ar c'hantikou a zo bet savet holl hervez « ar reolenn aour » ha dre virout ouz an « **hiatus** » pe ar « **stok-vogalennou** ».

Kantig an Azvent

Ton : « Creator alme siderum »

« Deut, Salver ar bed » n° 107 p. 59 (Recueil Le Marrec)

Ar "Mister" o tigori

(Ar ouel a chom diskennet)

An Displeger

Pevar mil bloaz bennak en deus gedet ar bed
Ma ve graet ar burzud 'oad anezan war-c'hed.
Eur Salver a c'heded, meneget en Eden
Gant Doue d'hor c'hent'Tad. Gant lenv ha gant pedenn
Abaoe hep ehan, Eze'h-Veur, Profeted
A c'halvas eus an Nenv ar Salver prometet.
Ganto pobl Israel galvou c'houek a gase.
Selaouomp. Ha ganto kempennomp hon ene.

Diskan

(Al laz-kana)

O nenvou, skuilhit ho klizenn,
Glavit an den just, o lizenn
Kellidit, douar, ar Salver
Hep ehan'er bed a c'halver.

I

(Eur c'haner : **Ozac'h-Meur**)

Eus Jakob savit, o sterenn,
En douar skignit ho skleurenn.
Mab Doue, ganet en eur c'hraou
Teuzit tenvalijenn ar gaou.

II

(Eur c'haner : **Profet**)

An dud a gerz war an hent fall
D'o drouk-youl e plegont gant mall.
O dizarbennit, va Doue,
O renit gant Ho paz-roue.

III

(Eur c'haner : **Profet**)

Gant aezennou brein ar pec'hed
Ez eo pep vertuz disec'het.
Bleunvenn savet war skourr Jese
Balzamt ar bed, Mab-Doue.

IV

(Kanerien : **Pobl Israel**)

Ne domp ket ken evit herzel,
Ne glever nemet trouz brezel.
Prins ar Peoc'h, ra gavimp an trec'h
Harpet war hollc'halloud Ho prec'h.

V

(Kanerien : **Tud klanv**)

Gant an anken ez omp brevet.
D'ar bouzar roit ar c'hleved;
Distaolit ar gomz d'ar re vut;
Rannit ar yec'hed d'an holl dud.

VI

(Eur c'haner : **Profet**)

Ra vezo d'eomp addiskouezet
Ar burzud a voe degouezet :
Eur Werc'hez o c'henel eun den.
Eur Vamm-Werc'hez ne vezo ken.

VII

(Kanerien : **Pobl Israel**)

Diskennit eus Ho tron uhel
Ra vezot hon Emmanuel.
Chomit goude war an douar,
Da domma d'hor c'halon glouar.

VIII

(An holl)

Aozit, Mari, hor c'halonou,
O c'hargit a zonezonou,
Evit ma vezint da Jezuz
Eur c'havell blot hag holl-blijus.

War al leurenn-c'hoari e vezo savet kraouig Bethleem : ar Mabig Jezuz
 en e gavell, ar Werc'hez Vari, Sant Jozef, en azen hag an ejen.

E-kreiz al leurenn e vezo ar c'hraou.

Tro-war-dro hag a-drek e vezo savet pizennou evit ar c'hoarierien ; ar
 re-man, dre ma teuint war al leurenn, a savo warno.

E traon al leurenn, er penn pella hag uhel a-walc'h, e vezo eul linsel
 hag a guzo da genta an aeled, eul linsel sklerijennet hag a gouezo d'ar
 poent merket.

Bras e ranko beza ar c'hoariva, anat eo, en abeg da niver bras ar
 c'hoarierien.

Ra vo kanerien ha musikerien e leiz. (Eur **vielons da** vihana a ve
 mat da gaout.)

*
 * *

Pa zigor an abadenn, ar ouel a zo diskennet.
 An Displeger a zo e-unan en a-raok-leurenn.

An Displeger

En Ano an Tad, ar Mab, hag ar Spered Santel. Evel-se bezet graet.

Ra vo meulet an Tad, ar Mab hag ar Spered !
 Ra vo c'hoaz ar Werc'hez gant an holl enoret !

Selaouit, va Breudeur, selaouit gant evez
 Eur gontadenn varzus, koz hag atao nevez.

D'an amzer ma komzomp anezan — pell a zo !
 Toskik da zaou vil boaz — e kêr Rom, Penn ar vro
 Anvet Kezar Aogust, d'ar poent e barr e vrud,
 A falvezas gantan goût niver an holl dud
 En doa galloud warno. Pep den a ranke mont
 En e gêriadenn, ma ve reizet ar gont.

E kêrig Nazareth, du hont e Galile,
 Dre gennerzi kalon an eil hag egile
 Eur c'halvez hag e wreg ouz al lezenn a sent
 Gorrek ha gant evez e kerzont war an hent,
 War an hent o c'haso betek kêr Bethleem,
 Kêr ar Roue David, tost da Jeruzalem.
 Bez' ez int eus lignez an Diouganer-Roue,
 Hag e kerzont sioul oc'h adori Doue.
 Rak ar wreg eo Mari, dre vurzud o tougen
 Abaoe ma roas d'an Arc'hael e c'houlenn.
 Hir an hent ha meinek !... Jozef, atao war-c'hed,
 A zalc'h penn an azen a zoug Mamm Mestr ar Bed...

Pa dizont pal o hent, poultrennek ha skuiz-bras
 E kavont Bethleem leun a dud a bep klas.
 Ar c'halvez a zo paour... hag ar vaouez a zoug !...
 Diarbennet ar geiz, a-wechou gant aer drouk...
 An doriou a chom kloc'h e pep ostaleri
 Dirak pedenn Jozef, dirak skuizder Mari...

Hag ez eont war ar maez, goustad ha lent o-daou
 Da glask lojeiz fenoz en eur c'höz tammig kraou.

Hanternoz ! Hanter-sioul pep tra !

Kantig

Dindan ar Volz steredennet

Ar ganerien pe al laz-kana

(Ton : « La terre dort et les grands cieux », Nedeleg Kanadian)



Din-dan ar volz ste re den net by eo mo. net an dou. a.



rou, Man. tell an noz zo du den net. Man by ar guez en c'ho.



Jou, din dan ar volz ste re den net, an led'ge sioul astennet

An displeger

(en-dra ma kendalc'h ar muzik da c'hoari goustad ha sioulik)

Nouel ! Noz benniget ! Genel 'ra
 Evidomp eur bugel
 Gwir vab an Holl-Uhel
 Hag hon Emmanuel.

Eil koublad « Dindan ar volz steredennet »

Ar ganerien

E-kreiz an noz, en eur c'hraouig
 Hor Salver a zo ganet.
 E gorf bihan gant he zraouig
 He deus Mari lurennet.
 E-kreiz an noz, en eur c'hraouig
 Evel an distera paourig.

Neuze e savo ar ouel. War al leurenn-c'hoari, kraouig Bethleem, Ar
 Mabig Jezuz, Mari ha Jozef. Nebeut a sklerijenn da genta.

O noz sioul

Eur c'haner (Ma'z eo ampart) pe daou pe dri. (E-pad ar c'han, Mari a ray hervez ar menozioù diskleriet er pozioù)

(Ton : **Stille Nacht**, Nedeleg alaman)

J. L. Mayet

O noz sioul O noz santel ! Mari gant he man, tell d'he bugel gou.
 O deus klas ket War he c'ha top, te ne ra gwas ket
 Je zuz a zo kous ket Je zuz a zo kous ket

II

O noz sioul ! O noz santel !
 Er c'havell distrantell,
 Gourvezet war eur guchennig plouz,
 Dindan gwarez E Vamm goant ha
 [dous,
 Jesuz a chom didrouz. (2 w.)

IV

O noz sioul ! O noz santel !
 Eur galon hep antell
 O deus ar Bastored kinniget,
 Ha Komzou flour o deus distaget
 D'o Salver benniget. (2 w.)

III

O noz sioul ! O noz Santel !
 Talvoudusat kentel
 Desket d'eomp gant Josef ha Mari;
 Puchet digomz ouz Hen adori
 Meulomp hep safari. (2 w.)

V

O noz sioul ! O noz santel !
 D'ar paourig didantell
 Kinnigomp eur galon binvidik
 Tavomp breman. Pedomp birvidik
 Ar bugel kizidik. (2 w.)

An displeger

(Ar muzik a gendalc'h goustad hag hanter-sioul)

Met breman petra 'zo ?
 Petra 'zegouez er vro ?
 ... Mor a gan... tro-war-dro...

Ar ganerien

Trede koublad « Dindan ar volz steredennet

Eur sklerijenn raktal a sked
 E tenvalder ar maeziou.
 Ar bastored a zo war-c'hed
 A spont o klevout moueziou.
 Eur sklerijenn raktal a sked
 Hag heol an deiz ne lugern ket.

An displeger

En oabl, Aeled
 A vez klevet.
 Selaouomp, ni,
 Pa ganont-i

Kantig an Aeled

(Ar re-man a vezo kuzet da genta a-drek al linsel)

An Aeled

Gloria ni excelsis Deo ! (2 w.)

(Ton : Les Anges dans nos campagnes)

I

Ar ganerien

Heson Aeled, a-zloc'h ar maeziou,
E-kreiz an noz a voe klevet.
Ganto breman ni 'sav hor moueziou
Ra vo dre-holl hor c'han strewet.

Diskan

Gloria... (An holl a-gevret)

II

Ar ganerien

D'ar bastored war gward o denved
En em ziskouez eun Ael skedus.
Mantret int holl dirak e c'hened
Hag e sklerijenn vuzudus.

Eun Ael en em ziskouez)

Diskan

Gloria... (An holl a-gevret)

III

An Ael en em ziskouezet

Na spontit ket ! met kentoc'h klevit
Ar burzud dispar emgavet :
E Bethleem, e kêrig David :
« Eur Salver d'eoc'h a zo ganet ».

Diskan

Gloria... (An holl a-gevret)

IV

An Ael adarre

An Doue-Mab, na brasat mister !
A c'han evel eur bugelig.
Bez' Her c'havot en eur c'hraou
Mailhuret en eur c'havellig. [dister,

Diskan

Gloria... (An holl a-gevret)

V

Ar ganerien

Met d'an ampoent e klevjont Aeled
O kas a-stroll o meuleudi.

'al linsel a gouez dirak an holl aeled)

An holl Aeled

En nenv ra vezo Doue meulet,
Ha d'an dud vat peoc'h ha dudi.

Diskan

Gloria... (An holl a-gevret)

An Displeger

Ar bastored

Divorfilet

Raktal a sent...

Emaint en hent.

Nedeleg ar Bastored

(Ar ganerien hag an Aeled, e baliou al leurenn-c'hoari.

Ar Bastored a zo en [hent)

Andante . Diskan *Broganow Rogee*

Ha no neu bet . e barr an neñw an dou e c'houek
an dou e krenn, Ha d'an dud e... eun er bed mañ
diwez
Le ve-nez ha gwr breiz bre mañ e sethle em,
e kêr da-vid, so far en noz... mañ a ga. vit
Met ar bas to red war ar maez A ro diskuiz d'o c'hoar fou faez

I

Ar ganerien

E Bethleem, e kêr David,
Safar en noz-man a gavit;
Met ar bastored war ar maez
A ro diskuiz d'o c'horfou faez.

II

Ar c'hanerezed

O daoulagad a zo damgloz;
Tremenet eo hanter an noz.
Prim warno sklerder 'zo fuilhet
Hag ech'n em gavont strañfuilhet.

(Epad an diskan ar Bastored an deu war al leurenn)

III

An Aeled

Na spontit ket, pastorigou,
Na c'houi, nag ho tenvedigou.
Klevit eur c'hel laouen-meurbet :
« Ganet ez eo Salver ar bed ».

IV

An Aeled

En eur c'hoz kraou pa zegouezot
Eur bugelig koant a gavot.
Ar mailhurennou her golo,
Gourvezet eo war ar c'holo

V

Ar ganerien

Lavarit d'eomp 'ta, Pastored,
Endra ma'z edoc'h emvoret
Ar pezh hoc'h eus gwelet fenoz
Hag a ra d'eoc'h kas ho pennoz !

VI

Ar bastored

Gwelet hon eus kannad Doue
Kaeroc'h eget brava Roue.
Klevet hon eus eur c'han nenvel
N'hon eus morse klevet henvel.

(Ar bastored a ya a-drenv, e traon al leurenn)

An displeger :

Mab-Doue, ganet paour, a varvo paouroc'h c'hoaz,
Rak n'en do na dilhad na netra war war groaz.
« Evurus ar re baour ». Ar bugel hor salvo,
Da genta ha dreist-holl davetan o galvo.
Ra vint lezet eta da genta da zonet,
Breudeur karet Jezuz, e wella mignoned.

VII

Ar c'hanerezed

Teuzet ar gwel hag ar c'hleved
Ez eo dilezet an denved.

Ar pastorezed

Da gêr Bethleem p'hon galver
Kerzomp da welout hor Salver.

VIII

Ar ganerien

Kavet o deus er c'hoz kraouig
Mari ha Jozef o-daouik.
Kavet o deus mabig Doue ;
Dirazan an holl a stoue.

IX

Ar c'hanerezed

Roet o deus o frofigou
Ha mouskanet o c'hantikou ;
Hag e tistront sebezet
Gant ar burzud 'zo c'hoarvezet


X

An holl a-gevret

Mabig Jezuz, ni 'zeu d'hon tro
D'Ho kanmeuli gant yez hor bro.
Resevit hor gourc'hemennou,
Selaouit ouz hor pedennou.

Nedeleg ar Beorien

(Ar ganerien)



II

Ar beerien

Evel eun den dister e c'han ;
Ouz ar madou ne ra ket van.
An Holle'halloudeg a vo paour,
Leun a zispriz evit an aour.

III

Ar c'hanerezed

Pinvidik-mor eo, ha padal
Gant ar c'houezenn diwar E dal.
E ranko gounit E voued
Evel an den En deus krouet

IV

Ar beorien

Brasoc'h ezommeg e vo c'hoaz
D'an deiz ma varvo war ar groaz,
Savet diwisk e-barz an aer,
'Us d'ar C'halvar, etre daou laer.

V

Ar ganerien

An dud a renk izel eo bet
Gwella mignoned Mestr ar Bed.
Klasker-bara, gouzanver naon,
Davetan kerz eta, hep aon.

VI

An Aeled

« Evurus ar paour a spered :
Ar bed en devo gounezet. »
Er c'hras e vezo pinvidik
Hag er Baradoz gwenvidik.


An displeger

En douar d'ar re glanv
Samm ar boan n'eo ket skanv.
Ar bugel-man eun deiz d'ar bobl a zistago :
« Deuit, holl dud bec'hiet, ha me ho tiskargo. »
D'ar c'hraou ra vo douget izili speredel
Izili holl-boaniet ar bugelig santel !


Nedeleg an glanvourien

Tud klanv a zo degaset war al leurenn, unan war eur c'hraoaz


Un poco maestoso *Prograur. Rôze*



Ma lig je zuz lu gel Ma ri, E'houi chouzant joan evi-domp.



na E'houi ge men perz en holl doe-niou hor gwasket traonienn



al lein rou Ma lig Jezuz lu gel Ma ri, E'houi chouzant



joan e n domp na

II

Ar c'hanerezed

Eun dorchenn blouz en eul laouer
Sed kavell kenta hor Salver.
War ar C'halvar, kaletoc'h c'hoaz
E vo, Jezuz, gwele Ho kroaz.
Eun dorchenn blouz en eul laouer
Sed kavell kenta hor Salver.

IV

Ar glanvourien

Da ginnig d'eoc'h, bugelig koant,
N'hon eus netra hervez Ho c'hoant.
N'hon eus nemet daouarn goull
Dre ma klemmomp er boan dillo.
Da ginnig d'eoc'h, bugelig koant,
N'hon eus netra hervez Ho c'hoant.

III

Ar ganerien

Bez' e tibabit ar poaniou
Rak evidoc'h'int tenzoriou.
D'eoc'h e talvezont da zigoll
Plijadur hor buhez diroll.
Bez' e tibabit ar poaniou
Rak evidoc'h'int tenzoriou

V

Ar glanvourien

Ouz Ho kwelout en nozvez yen
O c'houzant en Ho korfig den,
E vimp, war kroaz hor gwele blot,
Kalz evurusoc'h gant hol lod.
Ouz Ho kwelout en nozvez yen
O c'houzant en Ho korfig den.

VI

An holl a-gevret

Itron holl-garet ar re glanv
Gouzanv ganeoc'h a gavimp skanv.
Evidomp hag an eneou
E vimp laouen 'n hon ankeniou.
Itron holl-garet ar re glanv
Gouzanv ganeoc'h a gavimp skanv.

An displeger

Breman sed peorien all, klanvourien druezus !
Deredit, **pec'herien**, ken karet gant Jezuz !
Evidoc'h e tiskenn, evidoc'h eo ganet.
« Mignon ar bec'herien » e kar beza galvet
Holl bec'herien, hep mez,
Deuit d'ar c'hraoaz gant pres.

Nedeleg ar bec'herien

(o tont goustad war al leurenn)

lento e maestoso *Brogarour Rozec*

Jo zeñ, n'hor mi rit ket, Se zit hep aon Ma ri
 Hol le zit ne ho ped, En hoc'h ar ta. le u di
 rak sal. ver ar bed E. sal. Hen o do. ri

II

An holl bec'herien

Hen eo hor mignon bras
 « Mignon ar bec'herien »
 Diskouezet hon eus kas
 Kas gwall/grouaduriñ.
 Met gant skoazell ar c'hras
 'Omp bet penedourien

An diplerer : Mari-Vadalen!

III

Mari-Vadalen

Ennon ar seiz pec'hed
 A rene didruez.
 War E gomz'int tec'het
 Ha me chenchet buhez.
 Gantan'eo bet trec'het.
 Ar Vadalen divez.

An diplerer : Ar Samaritanez

IV

Ar Samaritanez

Gant komzou lent ha flour
 Karget a garantez
 Hen a ginnigo dour
 D'ar Samaritanez.
 Dour ar c'hras hag a sourr
 Betek ar wir vuhez.

An diplerer : An avoultrerez!

V

An avoultrerez

C'houi, Jezuz, an andon,
 Andon pep trugarez
 C'houi 'ginnigo pardon
 D'eur vaouez pec'herez.
 C'houi 'roio nerz-kalon
 D'ar gaez avoultrerez.

An diplerer : Sant Per!

VI

San Per

O Salver benniget
 Mil bennoz d'eoc'h, Jezuz!
 Dre m'Hoc'h eus kinniget
 Distaol trugarezus
 Da Sant Per gwir geuziet
 Eus e zinac'h mezus.

An displeger : Al laer dehou, al laer mat!

VII

Al laer mat

Met, o burzud dreist boaz!
 Na dispar madelez!
 Bez' e tigoro c'hoaz
 D'al laer, gant kunvelez,
 Kent mervel war ar groaz,
 Paradoz an aelez.

An displeger : Per Keriolet, ar penedour breizat!

VIII

Per Keriolet

Per Keriolet, gwéhall,
 En deus bet eur gwall-vrud
 Dre nerz e vuhez fall.
 Met e binijenn yud
 'Zo bet eur burzud all,
 Burzud gras mestr an dud.

An displeger; Respont Mari, repu ar bec'herien.

IX

Mari

Holl bec'herien ar bed
 — Ha gwall-sammet e vec'h —
 Bezit fizians bepred;
 D'am Mab kasit ho pec'h,
 Daerou puilh hag a red
 D'E galon a vo trec'h.

An displeger


D'an Ebestel mantret, gant Profet Nazareth.
 Dirak mammou laouen, e vezo lavaret :
**« Lezit ar vugale - na virit ket outo !
 Da zonet davedon, rak d'an dud evelto
 E vo va Baradoz. »**
 Floc'higou koant E lez
 Kanit ho kantikou ; distagit brao ho pezh.
 Da gavell Mab Doue
 Deredit, bugale.

Ar vugale a zeu war al leurenn hag a soubl a-gevret dirak ar Mabig Jezuz.

Nedeleg ar Vugale

Ar vugale

(Desket e vezo d'ezo ober ar jestrou dereat)



II

Jezuz, e-kichen Ho kavell,
 Er c'hraou, digor-holl d'an avel,
 Ni hon defe Ho **koudoret**
 Ha g nt doujans Hoc'h **adoret**.

V

Jezuz, c'houi '**labour** hep ehan
 Evit rei skol d'ar re vihan.
 Ni 'zesko piz hor c'henteliou,
 Ni 'raio mat hon deveriou.

III

En hor c'henver, Mabig Jezuz,
 C'houi 'n em ziskouez madeleus.
 Ni 'venn ivez, Salver ar Bed,
 Kinnig d'eoc'h **karantez** bepred.

VI

Bugel Jezuz, kalonig aour,
 Gwasket gant gwel Ho preudeur
 Ni 'ginnigo hor **profigou** [paour,
 Evit sikour ar c'heizigou.

IV

Mabig Mari, ni 'rank deski
 Gouz Ho kwelout penaos **senti**.
 D'hor mamm, d'hon tad, Salver Jezuz,
 Eveldoc'h ni 'vezo doujus.

VII

Ganeomp holl c'houi 'zo bennige
 Me gant ar pec'her pismiget.
 Evitan, a-greiz hor c'halon,
 E c'houlennomp, Jezuz **pardon**.


An displeger

Nag ez omp evurus
 O chom dirak Jezuz!
 Jezuz, ano karet,
 Ar brava 've kavet...
 Hel lavaromp d'ezan, dirak E Vamm-Werc'hez
 Ha dirak Sant Jozef beuzet el levenez...


Ano Jezuz

An holl, a-gevret ha daoulinet

Maestosi *Brogarour. Rozee*



Nag euz du di, dal ver ar led, ehom da son. jal en.



nos'h le. fured ! Brasoc'h le ve. nez a den nomp



eus ho pe zans gurlion en nomp.

II

An Aeled

Dreist pep unan oc'h diskennet,
 Etek mervel hoc'h eus sentet.
 Savet oc'h bet en abeg-se
 Gant Doue dreist kement a ve.

III

Ar ganerien

C'houekoc'h eget mel d'ar genou.
 Flouroc'h d'ar skouarn eget kanou.
 Gwell eget balzam priziuz.
 Ez eo Hoc'h ano, va Jezuz.

IV

Ar c'hanerezed

Esperans start ar bec'herien,
 Donezon ar c'houlennerien,
 D'an neb Ho klask na c'houi 'zo mat !
 D'an neb Ho kav, gwelloc'h avat...

V

Ar vugale

Eur brezegenn a { gavan } sec'h,
 { gavomp }
 Enni pa ne gavit ket lec'h ;
 Levr ebet ne ro { d'in } dudi
 { d'eomp }
 Pa ne ra ket Ho meuleudi.

VI

An Aeled

Nann ! kaer e vezo prederia,
 Nikun ne c'hello disleria
 — Rak n'hon eus ger d'hel lavarout
 Pegen dudiuz Ho karout.

VII

Ar c'hanerezed

Jezuz, d'an ene strafuilhet,
 Ez oc'h henvel ouz eol skuilhet.
 Ar Gwerchezed Ho kar eta
 Gwell eget an den brudeta.

VIII

Ar ganerien

Ano Jezuz eo gwir louzou
 Klenved pegus hon drouk-youlou.
 Gantan e vez atao trec'het
 Prins an Ifern hag ar pec'hed.

IX

An holl a-gevret

(nemet an Aeled)

Ano Jezuz, evel ar gliz,
 Hag evel eur c'houez-vat a briz,
 A ra d'in em c'halon tridal
 Ila gant hirnez an nenv gedal.

X

An holl a-gevret

Ia vo meulet ano Jezuz,
 Ano karet ha dreist-plijus.
 Met gantan ni 'venno meuli
 Ano ken c'houedk hor Mamm Mari.

An displeger

War an hent bras, du-hont
 Petra 'welan o tont ?
 Kelc'het gant ar bouldrenn,
 Evel 'n eur gorventenn,
 Sed eur garavanenn.
 Kanvaled, pakadou...
 Marell an dilhadou...
 Roue ? Prins ? Marc'hadour ?
 Pe strollad eur c'hadour ?

Rouaned ar Sav-Heol, war hent Jeruzalem,
 Sed ar garavanenn o tont da Vethleem...

Kantig ar Rouaned

(Eur steredenn lugernus a vezo staget ouz eun orjalenn ha sachet a-zioc'h ar c'havell d'an trede koublad, pa zeuio ar Vajed er c'hraou)

Al laz-kana

Triac *Brogarour Rozec*

Met he-tra zo c'haer re get gant an oabl ste re
dek ? Se rak e chom soue - get an huc-dour spe-re-dek ? E
bolz an neñv eur ste renn di-a nar-krenn d'e hud Eur-
zim a strink he skleu renn e rit sal ver an dud

II

An holl a-gevret

Eus ar Reter tri Roue
War-lerc'h eur steredenn
A gerz da glask o Doue
Deut war hor planedenn.
Met ar skleur a zo teuzet
E bro Palestina,
Ha d'an tri Maj enkrezet
Eo ret goulennata.

III

Al laz-kana

(Aman e teu ar garavanenn war al leurenn hag ar steredenn en he raok)

Ar Vajed o deus klevet
E kêr Jerusalem
E rank, hervez m'eo skrivet,
Genel e Bethleem.
Ar steredenn a-nevez
A sked a-zioc'h o fenn
Hag o c'has el levenez
Retek pal o beaj tenn.

IV

Dirak ar Mabig Jezuz
Ar Vajed a stoue,
Ha gant eun dremm vousec'hoarzus
Ec'h adoret Doue.
Kinniget o deus ezans
Aour ha mir, profou ker.
Met keuzia reont d'E vezans
En eur zistrei d'o c'hêr.

V

An devez-man eo gouel -
Hor c'henttadou pagan.
Drant kanomp eta : Nouel
Da wir gomz an diougan :
« Bugale 'zo deredet
A bep lec'h d'an Iliz. »
Skleur ar gwir en deus skedet
Warnomp Breiz-Izeliz.

VI

Ar c'hanerezed hag ar vugale

Allas ! er broioù gouez
Ez eus c'hoaz paganed.
Ne glevit ket o mouez
O c'houlenn leaned ?
N'o c'hlevit ket o c'hervel
Prezegerien ar Feiz ?
Ita vo gwelet o sevel
Ouspenn unan e Breiz.

VII

An holl a-gevret

Kinnigomp donezonou
D'ar Mabig Jezuz paour.
Gwelloc'h avat kalonou
Eget eur berniad aour.
Kasomp d'Ezan eur bedenn,
An ezans an dousa,
Ha gant mir hor pinijenn
Sikouromp hon nesa.


An displeger

Steredenn ar gwir Feiz he deus skedet warnomp.
Ha breman gant lorc'h bras e Breiz, e lavaromp :
Da Feiz hon Tadou-Koz, ni, Breiziz, 'vo feal,
Ni bepred he c'haro.
Gant Feiz hon Tadou-Koz, en hor c'halon leal
Ni holl a vo faro.
Nac'h Feiz hon Tadou-Koz ? Neuze ni da grial :
Nann ! Kentoc'h a maro.

Kanomp holl hor bennoz, kanomp holl a-gevret :
« Feiz koz hon Tadou ! Feiz karet ».

Feiz Koz hon Tadou

Ton: Faith of our Fathers! (kantik saoz)



Feiz koz hon ba dou, Feiz ha ret ' Gant
gwiz e vez c'hoaz da na ret ' sanket eo he ken dou en
hor c'hreiz hag ar re ier war ar dou breiz. Feiz
koz hon ba dou. Feiz santel ' Ni 'zalc'ho d'it betek mer.
vel. Ni 'zalc'ho d'it betek mer. vel.

II

Feiz Koz hon Tadou! Da gredenn
A reizo bepred hor pedenn.
Dre Santez Anna hag ar Werc'hez
E virimp da bep gwirionez.
Feiz koz hon Tadou! Feiz Santel!
Ni 'zalc'ho d'it betek mervel. (2w.)

III

Feiz koz hon Tadou! Gant Jezuz
Ni 'venn beza karantezus.
N'eo ket hepken dre gomz ar genou
Met dreist-holl dre vadoberou.
Feiz koz hon Tadou! Feiz Santel!
Ni 'zalc'ho d'it betek mervel. (2w.)

IV

Feiz koz hon Tadou! Te 'ro nerz
D'an neb a c'houzanv en da gerz.
Ni 'vezo dougerien-groaz divrall
Evel hon Tadou-koz gwechall.
Feiz koz hon Tadou! Feiz Santel!
Ni 'zalc'ho d'it betek mervel! (2w.)

V

Feiz koz hon Tadou! Tud fallakr
A skign warnomp komzou disakr.
Gant hor c'henttadou ni'lavaro
« Kent ar pcc'hed, gweil ar maro! »
Feiz koz hon Tadou! Feiz Santel!
Ni 'zalc'ho d'it betek mervel! (2w.)

An displeger: Meuleudi d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel,
evel m'az eo bei a-viskoaz, ma'z eo breman hag e vezo bepred, a-hed ar
c'hantvedou.

Meuleudi ouspenn da Vari, ar Vamm-Werc'hez m'eo deut drezi Mab
Doue da en em ober den ha da veva en hon touez.

Evel-se bezet graet!

Dindan ar volz steredennet

I

Dindan ar volz steredennet
Ez eo moret an douarou.
Mantell an noz 'zo distennet
War beg ar gwez er c'hoadou.
Dindan ar volz steredennet
Ar bed 'zo sioul astennet.

II

E kreiz an noz, en eur c'hraouig
Por Salver a zo ganet.
E gorf bihan gant he zraouig
He deus Mari lurennet.
E kreiz an noz, en eur c'hraouig
Evel an distera paourig.

III

Eur sklerijenn raktal a sked
E tenvalder ar maeziou.
Ar bastored a zo war-c'hed
A spont o klevout moueziou.
Eur sklerijenn raktal a sked,
Hag heol an deiz ne lugern ket.

IV

Ar bastored, buan-buan
A zered laouen d'ar c'heo.
Dindan ar roc'h, da bep unan,
Jezuz a vouse'hoarz en neo.
Ar bastored, buan-buan
A soubl dirak ar Mab bihan.

V

Evidoc'h, bugelig Jezuz,
Ni 'zeu d'hon tro da gana.
Bugel-Doue madelezes,
Resevit hor c'halanna:
En ho kenver, mabig Jezuz,
Ni 'vo bepred karantezus

An embanner: Ar merc'hed breman, gant o dilhad kaer, dilhad hon
dukezed gwechall, a zo o vont da rodal, da fougeal ha da zansal dirazoc'h
endra 'vezo kanet :

Ar gwir Vreizadezed

Brogarour Brozec

Gwisket evel hon du. ke. zed, Merc'hed Breiz, na c'houi
'zo koant! Eg n'eo, e. vit rou. a. ne zed d'ho ke.
Diskan
mer e ne. fe c'hoant Iba c'hed Breiz, mer c'hed
di me. zed, Cho. mit holl Bre. zo. ne. zed ... ne. zed.

I

Plac'hed yaouank gwisket gis-kêr

Gwisket evel hon dukezed
Merc'hed Breiz, na c'houi 'zo koant!
Ez wir, evit rouanezed
D'ho kemer e vefe c'hoant.

Diskan

gant Breizadezed ha dre zansal

Plac'hed Breiz, merc'hed dimezet,
Chomit holl Brezonezed, (bis)

II

Plac'hed kêr

Gant ho koefig ken kaer toullet
Gwintet war gernig ho penn,
A wechou war bleo rodellet,
Staget evel eskell gwenn.

III

Plac'hed kêr

Gant ho kemzou dantelezek,
Kinklet brao ho korfennoù,
Gant ho tavanjeriou seizek
Ha boulouz ho lostennoù.

IV

Plac'hed kêr

Harter-guzet kofig ho kar,
Troedig mistr, skanv e gammed,
Nann, ne gavo ket neb a gar
Eravoc'h stumm, kaeroc'h merc'hed.

V

Breizadezed

Distagomp atao brezoneg,
Yez hor mammoù, komz hor Breiz.
En em voaza re d'ar galleg,
En hor bro ne ve ket reiz.

VI

Breizadezed

Argasomp pell diouz hon touez
Pa gorollomp holl e tro
Ar dansoù mezus ha gouez.
Dansomp hervez giz hor bro

VII

Breizadezed

Ma rafemp hon « Itronezed »
Ne vemp ket karet da vat.
Hep mar e vefemp dilezet
Gant paotred yaouank hor gwad.

An Enkanter: Selaouomp c'hoaz ar yaouankizou, paotred ha plac'hed
yaouank, o kana d'eomp kan bale an hent.

Pootred ha plac'hed yaouank holl yac'h
Hag a gerz, evel marc'h goude kerc'h
Ma ranko pep koziad ha pep gwrac'h
Dre jilgamma chom pell war o lerc'h.

Kan-bale : An hent

(An holl)

Diskan
marc'h

Argasomp. Rwez.

Ni paotred yac'h a gar ar c'herz; Hon tued a
vac'h an hent gant ruz ar boan en nac'h dre gar hor
gwez. An hent 'zo hor a gas d'ar fal; di ves. her
dir, c'houe zenn an tal. Er striz a vir an tued a dal.

II

Plac'hed yaouank

Ha skanv ho kar?
An hent 'zo brao.
En heol a bar
Pe dindan glao
An neb a gar
A gerz atao

IV

Plac'hed yaouank

An hent a gouez
D'an draonienn c'hlas.
E skeud ar gwez
Betek ar waz.
Skuizder ha gwrez
A goll o blaz.

III

Paotred yaouank

An hent a sav
D'eist ar menez;
Warnomp ma plav
Digalaniez
En nec'h ni 'gav
Al levenez.

V

Paotred yaouank

An hent 'zo striz
Etre daou gleuz,
D'ar penn e tiz
Hep klask a-dreuz.
Hervez e c'hiz
Da vont hon eus.

VI

Plac'hed yaouank

Dehou-ha-kleiz
E kaver foz;
D'al linenn greiz
Ret derc'hel kloz.
An hent 'zo treiz
Dreist-holl en noz.

VII

Holl a-gevret

Kerzerien greñv
Dalc'homp d'hor roll.
War hent an nenv
Ba'eomp holl.
Fignerien wevn
N'hor bo ket koll.


An embanner : Evit kloza, va mignoned ha kenvroiz ker, ar barz-kaner a zo o vont da gana d'eomp e hetou a vloavez mat.

Rak emaeomp en derc'hent da zigeri eur bloaz all, unan muioc'h kinniget d'eomp gant Doue, unan nebeutoc'h da veva war an douar.

Kenavo d'ar bloaz koz ha kanaouenn
D'ar bloaz nevez, ma vo hen holl laouen.

Bloavez mat!

Hetou ar Barz



II

Eur bloavez mat a reketan
Ne ve ket gwelloc'h egetan.
Ra blijo gant Mari ranna
Da bep unan e galanna.

V

Buhez hir d'ar vugaligou
O kousket er branselligou,
Rak gwelloc'h eget eur bern aour
Ez eo bugale d'an den paour.

III

Gant ho korf ra choino yec'hed,
Ra vo hoc'h ene hep pec'hed.
En em garit kenetrezo'h
Ma vo Doue meulet drezoc'h,

VI

Evurusted d'an dud nevez
Dreist d'ar velkoni m'o devez.
Ha na vo ket hep ti nag oz
Hon tadou hag hor mammou-koz.

IV

Goulenn a ran ma raio berz
Kement tra hoc'h eus en ho kerz,
Hag e sonjan er gouerien
Kement hag el labourerien.

VII

Na spontit ket, ma teu poaniou
D'ho korf, ha d'ho spered doaniou;
Rak ar c'hristen, e-doug ar bloaz
A rank chom sammet gant ar groaz.

VIII

Bloavez mat eta, Breudeur ger,
D'an dud a-bell, da dud ar gêr.
Goudê deizioù hir-burzudus
Ra vimp en nenv holl evurus!

Evit echui, ar poz diweza-man a vezo adkanet gant an holl c'hoarierien.
Hag echu an abadenn.

DIWEZ